

CHANSON NEVEZ

VAR SUJET

EUR BROMEZE FERVANT HAG EUR SEPARASION ETRE DAOU DEN YAOUANK



var ton ar Feuz Promese

Prosternet e ma c'halon
N'ho presans, Bretonet,
Vit goulent o c'hattansion
Eur momet en sekret :
Me disclerio en guirion
Eur promeze servant
Hag eur separasion,
Entre daou den iaouank,

Na fell ket din er poent man,
Dont d'abuzio paper;
Sujet avoile h a gavan
Hep asten ar matier
Eur re-bennag marteze
A gemero an er
Da meprisan ma bue
Dre ma c'hespliki skler.

N'ont ket dign a droug-zello
Pa n'am anaveet ket,
Rae zavantoc'h evidon
A zo bet n'em leuyet.
Ebars en lazo Venus
Hac e mab Cupidon
Pere a rent maleureuz.
Sivoas ! meur a galon.

Me zo eun den iaouank
Hac a meus consentet
Karout eur plac'h iaouank
Dign da vean karet;
Vit dirag ma daoulagad
Na meuz remerquet hini
Da gad eun er ken agreabl
Herve ma fantasi.

Vel gant Doue inspiret,
Da ouel en Assumption.
Me a zo bet azeet
N'he c'hichen'n eur pardon.
En parouz Pleudaniel,
Kichen eur goz ilis
Eur plas devot a zantel
Goude fin an ofiz.

En Var douar ar Verc'hez,
Me meus bet remerket
He skiant hac e furnez
Ha memez e genet.
Me meuz groet reflecion
Ha n'em sonjet erfat
Na momp biken separasion
Vit mar be ze d'he grat,

Abofster ma'iaouankis
A neus ma erretet.
Bet a voan vit n'em diviz
Ha pa m'eus ket kredet
Parlant deñ e nep fesson
Demeuz ar garante
A zauten bars em c'halon
N'he c'hever en deze
Nao miz em bet'en guirion
Hep en em roncontri
Delc'het ho c'hastansion
Iaouankis, me o suppli
Amaa e teu Cupidon
Gant eun ardeur neve
Da alumii, 'nem c'halon
Elemancho a garante.

Annonz a riz d'ar plac'h-se,
O vont d'eun assemble
Ponoz am boa bolante.
Da gat e c'hamitie :
Hac evit n'em assuri
Deuz he fidelite
A meus goulet diganti
Ober din promesse.

AR PLAC'H.

« Ma mignon nimp so ioaouank
D'ober promesseou :
Gant ann distaran tourmant
A chanc'h hon ideou :
Ma torfemp hoo pr'messe
Hac ober eur parju
Me fell diu en em l'ue
Kavet eur guir assu. »

AR POTE.

« Birviken an amz r fall
Na allo distruijan
Ar garante leal
Pehini a dougan ;
Mes me zo en dishans
Demeus ho carant :
Roet din ann assuans
Vit ar rest hon bis. »

AR PLAC'H.

« Ars'a eta, ma u'gnon,
pa omp en plas hirie
Na vo quet dre draison
A rin d'ec'h promesse

Kemer a refomp vit test
Eun avocat a Dreguer,
Rae, on c'halon so c'hoas fresh
Da chom nep culatenr. »

He dorm en hem hini.
Prosternet d'an daoulin
Dirag Sant Eryoan Elouri,
Mab-henan Kervarzin,
En iliz ar Minih,
An naontek a vismae
A promeljomp dimezi
Hon daou ann eil d'eguile.

Secret ve ar promesse
Dirag eur pobl a leiz :
Pere direk an de-ze
A bep coste a Vreiz
Da velet penn ho avocat
Dre guir devotion
A douger var eur branchar
Bars er procession.

O solennite joaüs
Evit eur bopl a fe ;
Biskoas de ken evuroz
N'em boa cat em bue,
Zantout a ran ma c'halon
Val beuet mesk ar joa :
Mes ret e cat separation
Rac an noz a dosta.

AR POTR.

« Ars'a, plac'h iaouank fidel,
Poent eo disparian.
Ac h'ol so arri iz :
Lexe, ... breman
Eua termen d'a n'em gavt
Herve ho polante,
Rae pel a omp separat
An eil deutz eguile. »

AR PLAC'H.

« De eis, ... ar Zecramant
Bars en kær laudreguer,
Zo eun assamble charmant
Gant ar bobl ar 'hartier
Mar be ze d'hu polante,
Hon daou ... impario
En Landreguer, en de se
Goude ar koespero. »

AR POTR.

• Varkement-ze, merc'hiaouank
Me souet d'ec'h bonsoar,
Gant kals a agreamant.
Me a dalc'ho memoar.
D'an termen a c'heus fisjet,
Kredet me'n em gavo;
Na vesomp biken separat,
Vit ar rest on deyo. »

Pa ariis bars er guer,
A meus bet ispliket
D'enn tad a deur vamm' tener
Ar promesse moa gret.
O daou a skuljont daero
O c'haneveout ma chane,
Mes nôs eo pell a zo
Reposomp en silinc.

Kerkent e valuez kousket,
Vel 'n eur ravissamant,
Hag e meus bet remerket
Eur groas ker a are'hant
Ha varni eur gurunen
Ornet gant grêun perles,
Poset en kreis eur bleuen
En kichen ma mestres.

Dre spont on bet disunet
Mes goelet meus bet erfat
Ma mestres bars'n eun archet
Dirac ma daoulagad;
Bet on pell vemonin
Var sujet kement-se;
Mes rabet eo'n droublin

Tostat a ra d'an termen
Pini m'am passinet;
Mes goelet a ran eu den
O tonet d'am c'havet!
Roet neus din eul lizer
A zo bordet en du
Petric zo var ar paper,
Ret eo goelet justu.

Al lizer

• Salut deoc'h ma guir vignon,
C'hoas eur vech, dre speret;
• N'in quet d'an assassin
A moa dec'h promettet.
• Skoeto gant eur c'blevet,
Me gret vit ar maro,
• N'omp ket gan Doue choaset
Vit bean orieo,

• Ma be a deui da gleuzan
Var ben neubeut amzer.
• Vit ar vach divezan
Adieu ma servijer,
• Gras dimp da gaout chons,
D'an n'em velet er gloar
• Evit hon recompans. »

Ar Potr, ouï-han he unan

• O bleuen ker florissant
Ma konees d'an douar,
Tout ma oll agreeamant
A chancho en glac'hâr;
Oll esperans ma deio.
Pladjur ma bue,
Assembles guenit a goeo
Da repos bars a a ve

Rabet eo discousoli
Vit guelet al lizer,
An termen a so arri;
Varc'hoas en Landreguer,
Me a glevo a beurs mad
Ha guir eo kement man;
Ar paper a lest lakat
Sort a guerer varnan. »

Arri bars a Landreguer,
O'an termen assinet
Vel ma sonna peder heur,
Me meuz bet infantet
Eur plac'hik iaouank tremen,
Karet d'he c'hamaradez;
• Sell aze eme zi eun den
Zo maro he vestrez. »

Poignardet eo ma c'halon
Ken a frim ma goad
Vit klevet et declariation
En em c'hanavis d'he c'had;
• Respong din merc'hiaouank,
Mar be ho madelez,
Me a c'houli humblamant,
Penos a ra ma mestrez. »

AR PLAC'H IAOUANK

• Nu servij ket den iaouank,
Rei d'ech anoi'd gues;
C'hour a zo bet eun tirant
En andret ho mestrez.
Hi diwoar gâr maro
A lekas he fâ
Da skrivau deoc'h ar c'heho
Mes c'heus ket groet a van.

Me a moa e c'hasistet
Da skrivan al lizer
Goude ma franchisset
Ha roet d'ar facteur.
Hi fuissa he bue
D'ar goener d'abarde
Ha herie deus ar beure
E diskennet 'n he be. »

AR POTR.

• Ma moa kals a esperans
A voâfauz al lizer,
Pe groet gant tud a Mezans
Vit tremen ho amzer.
Mes ho komzo ken pikant
A boes var ma speret
Me a lar dec'h merc'h iaouang
Kenavo'r c'henta goelet. »

Kouitat a riz an assamble,
Occupet ma speret;
Rak me en em vel hirie
Maleureus varar bed.
Ma mestrez a zo maro
na me a chom breman
Da dipitan ma deio
Var he ler'ch er bed-mar. »

N'veean ket ar matier
A galme ma glac'hâr;
Me na mo ken mes malheur
Biken var an douar.
Pa velan peguen iaouank
A c'he deup ar maro
D'am plomji bars en tourmant
Deus a greis ma joao. »

Servij ket din chom aman
Da isplikan kanvo
Rac na allan ket kanan
Ha goelan var eun dro;
Supplian a ran Doue
Maro var ar C'havalvar
Ma recevo he c'hine.
Ha uimp holl en he gloar. »

Groet gant Pierre RESON,
Goude bén récoyante de klaration
Digant eun dan iaouank desolet
Gant glac'hâr de yuan karet.

(Propriété de l'éditeur)

Lanhuan, intânez ar Goffic, lever

